

Ha pas p'g'imprimerie

KANTIK

ZANTES ANNA MAOUBNET



DISKAN

Itrôn Zantes Anna,
Mam an oll Vretonet,
Goulennet dreist peb tra
Ma vemp fidel bepret.

1

Dre-oll e Breiz-Izel
A klever ho hano,
Ha ni a voez huel,
Ni ive a gano :

II.

Pell ouz hon bro garet
Hon stad a zo dister !
Hon labour zo kalet !...
Eur zellik..... Mam dener !

III.

Braz ha hir ve ar boan
O c'hounit ar bara
Ha lec'h da gavet doan
D'an hini n'euz netra

IIII.

Hon c'halon kouskoude,
Hon c'halon ve laouen,
Pa sonjomp noz ha de
E sicour ho peden.

V

E kichen trôn Doue
C'hui zo ken gallouduz !
Evit ho pugale
O bezet truezuz !

VI.

Ho pennoz war n'omp-ni,
Bretonet an Naounet,
Ni dalc'ho d'ho pedi.....
Ouz peb droug hon miret !

VII.

Miret ouz peb goalen
Hon c'horf hag hon speret ;
~~Tro-war-dro zo anken,~~
Ha pec'het miliget !

VIII.

Mes dreist oll d'hon Ine
Bue vad er bed ma,
Hag en Env gant Doue
Karet Zantes Anna!

G. M.

*(Le P. Guillaume Mahé,
J. J.)*



Landreger, e ty AR FLEM, Mouler ann otro 'n Eskob.